

BACCALAURÉAT TECHNOLOGIQUE

SESSION 2008

BRETON

LANGUE VIVANTE 2

Série STG (Sciences et technologies de la gestion)

Spécialité « communication et gestion des ressources humaines » Coefficient 3

Spécialités « comptabilité et finance d'entreprise » Coefficient 2
« gestion des systèmes d'information »
« mercatique »

Durée de l'épreuve : 2 heures.

L'usage de la calculatrice et du dictionnaire n'est pas autorisé.

**Dès que ce sujet vous est remis, assurez-vous qu'il est complet.
Ce sujet comporte 4 pages numérotées de 1/4 à 4/4.**

| | |
|---------------|-----------|
| Compréhension | 10 points |
| Expression | 10 points |

Amañ e oa bet lazhet va mignon

Abred e oan en em gavet er vered.

Deuet e oan war va zroad, a-dreuz ar fenneier hag ar parkeier.

Chomet e oan kuzhet e-touez ar bezioù hag ar c'hroazioù da sellet ouzh an dud o tont d'an iliz, a-unanoù, pe a-familhadoù, gwisket e du, o ouelañ, oc'h en em harpañ an eil re ar re all betek an nor.

Neuze e oa en em gavet ar c'harr-kañv, ar familh war-lerc'h. Ur c'harr-kañv nevez-flamm du ha mouk o lugerniñ dindan bannoù an heol. Kaer e oa an amzer.

An tad o skorañ¹ ar vamm, ar c'hoar yaouank hag ar breur koshañ harp enno. Ar vamm-gozh gant he bazh, o sellet a bep tu, kollet he spered ganti.

Gant ar gendirvi e oa bet dougenet² an arched en iliz war-lerc'h ar groaz aour, ar c'hurust³, hag ar bokedoù bleunioù. Kalz tud yaouank a oa en obidoù⁴.

Neuze e teuas ar vered da vezañ goullo adarre. Ne chome nemet ar c'harr du ha mouk, o lugerniñ e penn tour an iliz. Ha me skoachet e-touez ar bezioù. N'em boa ket kredet mont e-barzh. Re vlank⁵ e oa va divesker⁶ ouzhin, re ruz va daoulagad, re e krene va daouarn, re e lope va c'halon em c'hreiz.

Klevet a raen an oferenn a-bell, mouget ar mouezhioù gant ar mogerioù tev. Ar c'hantikoù, ar pedennoù, an ograou... ar vignoned, ar gerent o keuziañ d'ar mignon, d'ar breur, d'ar mab "aet kuit re abred, e barr e yaouankiz, ur paotr yaouank ken laouen, ken brokus, ken karet gant an holl..."

"Disadorn vintin war dro 4 eur e oa bet lazhet Bastian, ur paotr ugent vloaz. O paouez serriñ e oa an ostaleri war ribl an hent a gas d'ar bourk. Tolpet⁷ e oa ar yaouankizoù dirak an ti. O sellet e oant ouzh ur paotr yaouank ugent vloaz a oa o kas e garr a-herr⁸, a-hed hag a-dreuz ar straed, mont ha dont, c'hoari an dro a bep tu d'ur renkennad kelornioù-lastez da zastum ar gwer, ar boutailhoù plastik, ar paper, ar restachoù boued. "C'hoari rodeo" a reer eus ar c'hoari-se. Edo ar re all o klask lakaat anezhañ da chom a-sav. En aner. En un taol kont e yeas ar c'harr dirollet da skeiñ ouzh ur c'helorn-lastez ha d'e zibradañ pell hag uhel. Ken ma kouezhas a-flak war benn Bastian, ugent vloaz, a oa o sellet. Lazhet ar paotr yaouank war an taol. Tec'het e oa ar muntre, nemet paket eo bet en e gêr abred diouzh ar mintin gant an archerien. N'oa ket divezvet⁹ c'hoazh ha roudoù kanabiz a zo bet kavet en e droazh¹⁰. Kaset e vezo dirak al lez-varn... "

Soñj mat am boa eus ar pennadoù er c'hazetennoù d'ar Sul vintin ha kemend-all war gwagennoù ar skingomz.

¹ Skorañ : harpañ

² dougenet : douget

³ kurust : paotr yaouank a zo en e garg sikour ar person

⁴ obidoù : interamant

⁵ blank : gwan, dinerzh

⁶ divesker : divhar

⁷ tolpet : bodet

⁸ a-herr : buan-tre

⁹ ne oa ket divezvet : mezv e oa c'hoazh

¹⁰ staot

35 Echu e oa an oferenn pelloc'h. Edo erru an dud er-maez eus an iliz goude bezañ
bet o taoler¹¹ ur berad dour benniget war arched Bastian. Lod eus ar re gozh, ha tud
yaouankoc'h o tont a-bell moarvat, a oa o vont war bez o re varv. Neuze ez is kuit, war va
c'hiz, a-dreuz ar parkeier hag ar foenneier, war va zroad.

40 Ken blank all atav, ken leun atav va daoulagad a zaeloù, o krenañ kement atav, ken
kreñv all va c'halon o skeiñ em c'hreiz. Kavout a rae din e oa unan bennak o tispenn va
roudoù¹². Ur skeud. Div galon a gleven bremañ o respont an eil d'eben. Kalon... Bastian.
Bastian va mignon er skol vihan, va mignon er skolaj, Bastian o teskiñ ur vicher, Bastian
gant e vignoned o riboulat da Sadorn da noz, Bastian o vousec'hoarzhin, Bastian o kanañ
45 a-bouez-penn... Meur a wech e trois va fenn, da glask gwelet dremm Bastian em c'hichen.
Mousc'hoarzh Bastian...

N'em boa ket c'hoant da zistreiñ d'ar gêr dre hent an drouklazh. Koulskoude ez is
dre an hent-se. Un dorn a oa war va skoaz o heñchañ ac'hanon, dorn Bastian.

50 A-bell e welis tud bodet dirak an ostaleri. Deut da guriuzenniñ¹³. Atav edo ar c'harr
eno war e gein, hag ar c'helorn-lastez difaragouilhet en e gichen. Serr e oa an ostaleri.

Muioc'h-mui e krene va izili ouzhin, blankoc'h-blankañ e oan, kreñvoc'h-krenvañ e
skoe va c'halon... hag hini Bastian.

Sec'het e oa bet ar gwad diwar an hent e-touez an drailhajoù gwer hag an tammoù
lastez.

55 Amañ e oa bet lazhet va mignon... ganin.

Goulc'han KERVELLA, « Amañ oa bet lazhet va mignon », *Dre ar prenestr*, Al Liamm,
2006.

¹¹ taoler : teurel

¹² o tispenn va roudoù : o vont d'am heul

¹³ kuriuzenniñ : ober e fri-furch

I – Compréhension du texte- Kompren an destenn (10 points)

Respontit d'ar goulennoù / répondre aux questions par une phrase au moins :

1. Penn-kentañ an istor : perak emañ bodet an dud ?
2. Piv a oa eno ?
3. Perak e oa kalz tud yaouank ?
4. Unan n'en doa ket kredet mont e-barzh an iliz. Perak ?
5. Pegoulz e oa erru ar gwallzarvoud ?
6. A beseurt doare "rodeo" e komzer amañ ?
7. Penaos e oa bet lazhet Bastian ?
8. Petra en doa graet ar muntrer goude ar gwallzarvoud ?
9. Pelec'h e oa bet komzet ag an afer-se ?
10. Peseurt doare paotr e oa Bastian ?

II – Expression écrite- Emzispieg (10 points)

Choisir l'un des deux sujets suivants / Dibabit unan eus an daou sujed kinniget ha savit ur pennad (200 ger)

1 - Alvokad ar muntrer oc'h : petra a c'hellfec'h lâroust evit difenn anezhañ ?

2 - Plijout a ra d'ar yaouankizoù tostaat douzh an dañjer. Petra eo ho soñj diwar-benn kement-se ?